

AOZIT
HENTOÙ
AN AOTROÙ !
KOMPEZIT
DEZHAÑ
E HENT !



du 1988

ar
fulenn 10

AN AZVEND - BLOAVEZH K

- Ar beleg gant person Ars
- Petra hon eus-ni da ober ?
- Ar bedenn diwar ar Vetalenn Vurzhudaouüs
gant Sant Maksimilian Kolbe

azvend 1 - K

kempedenn - Ho pedif a reomp, Doue hollc'halloudek, roit d'ho tud fidel ar c'ho-
ant gwirion da vont, leun a oberoù mat, en arbenn d'hor Salver pa
zeuio, evit bezañ lec'hiet a-zehoù, en e gichen, ha kaout perzh gantañ e Rouante-
lezh an Neñv. Drezañ, ho Mab hag hon Aotrou, Doue bev ganeoc'h ha gant ar Spered.

lennadenn gentañ - Doue a ro e c'her: dont a raio e-unan da gemmañ dremm ar bed.
Ar ger "reizhded" a zo teir gwech en destenn-mañ ha d'ar Me-
siaz eo lakaet an anv brav a "Gellidenn ar reizhded". Gantañ eo e vo adkempenn-
net, adsavet pep tra.

Doue a lakao da sevel diwar wrizienn David un hadenn a justis : da lavarout
ar Mesiaz, Mab bihan da Zavid ha Mab Doue war un dro.

LENNADENN TENNET EUS LEVR AR PROFED YEREMIAZ 33, 14-16

- 15 Setu deizioù o tont, ems an Aotrou Doue
ma lakin da zont da wir ar bromasa am eus graet
diwar-benn Ti Israël ha Ti Youda.
- 16 En deizioù-se, hag an amzer-se, a lakin da ziwan ur blantenn a Justis (*)
hag a zalc'ho al Lezenn hag ar Justis ar vro.
- 17 En deizioù-se e vo salvet Youda.
ha Jeruzalem a vavo didrubuilh war he douar.
ha setu amañ an anv a vo roet dezhi : an Aotrou (eo) hor Justis.
- 18(*) en destenn : e lakin da gellidañ ur c'hellid a justis.

SALM 24, 4bc-5ab, 8-9, 10 & 14

R/ (1b) War-zu ennoc'h, Aotrou, e savan va ene.

- 4bc Hoc'h hentoù, Aotrou, grit din o anaout
Hag ho kwenodennou, deskit-i din-me.
- 5ab Heñchit ac'hanon en ho kwirionez, va c'helennit
Rak c'hwit eo va Doue, va Salver.
- 8 Mat ha gwirion eo an Aotrou
Setu prak e ro kentel d'ar bec'herien war o hent
Heñchlañ a ra an dud izel er Reizhded
Deskit a ra e hent d'an dud izel.
- 10 Holl hentoù an Aotrou a zo madelezh ha fealded
Evit ar re a vir e emglev hag e destenioù
- 14 Sekredoù an Aotrou a zo evit ar re a zoug anezhañ
Hag e tiskulih dezho e Emglev.

2^e lennadenn

N'eus ket gwelloc'h tu da geñst gant Jezuz eget seveniñ, dibaouez, e Aviel.

Plijet gant Doue kreñvaat ho kalonoù a-benn Donedigezh Hor Salver.

LENNADENN TENNET EUS LIZHER KENTAN AN APOSTOL SANT PAOL
DA GRISTENION DESALONIKE 1 Tes. 3, 12-4-2

Va Breudeur !

- 12 Plijet gant an Aotrou lakaet ho karantez da greskiñ
ha da vezañ dreist-muzul an eil e-keñver egile hag e keñver an holl,
evel m'amañ hor c'harantez-ni hon-unan en ho keñver.
- 13 Plijet gantañ, startaat ho kalonoù evit ma c'hellot an em zerc'hel didamañ
ha santel dirak hon Doue hag hon Tad,
pa zeulo hon Aotrou Jezuz gant e holl Sent.
- IV1 A-hend-all, va Breudeur, setu amañ ar bedenn hag ar goulenn a reomp deoc'h

azvend 1 - K

en anv an Aotrou Jezuz.

Desket hoc'h eus diganeomp peseurt hent hoc'h eus da heuliañ
evit plijout da Zoue; han heuliañ a rit dija,
met goulenn a reomp diganeoc'h hen ober kelz gwelloc'h c'hoazh.

- 2 Rak gout a ouzoc'h peseurt gourc'hemennou hon eus roet deoc'h
a-berzh an Aotrou Jezuz.

Alleluia!

Salm 84.8 Diskouezit dimp, Aotrou, ho madelezh
Ha roit dimp ho silvidigezh.

aviel- E-lec'h bezañ diskaret gant an anken, e-lec'h labaskennañ war hon dise-
blanted, deomp en arbenn da istor ar bed-mañ, gant goanag, gant evezhded,
gant peoc'h. Ha deomp, war-sav, da ziambrougiñ Mab an Den a zo o tont.

Aviel Jezuz o komz diwar-benn fin ar bed hag ar merkoù anezhañ
PENNAD EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT LUKAZ 2f. 25-28, 34-36

En amzer-se e lavaras Jezuz d'a ziskibien :

- 25 Bez'e a vo sinioù en heol, al loar hag er stered,
ha war an douar enkreiz a-touez ar Broadoù,
hep gouzout war be du treiñ gant touni ar mor hag an tonnoù.
- 26 An dud a semplo gant ar spont o'n em c'houlenn patra a vo-
da gouezhañ war ar bed-holl,
rak galloudegezhioù an neñvoù a vo brallet.
- 27 Neuze e vo gwelet Mab-an-Dan o tonet war ur goabrenn
gant galloud ha gloar vras.
- 28 Pa stago an traoù-se da c'hoarvezout,
adsavit ho kalon ha sonnit ho penn
rak amañ tost ho Silvidigezh.
- 34 Diwallit ouzhoc'h hoc'h-unan gant an na va ponneraet ho kalonoù
gant an dirollerezh, ar vezventi ha prederioù ar vuhez-mañ,
ha na gouezhfe warnoc'h a-daol-trumm an deiz-se.
- 35 evel ur roued: rak dont a raio war an holl dud a zo o chom
war c'horre an douar a-bezh.
- 36 Beilhit eta, e pep amzer, en ur bediñ evit ma viot gouest
da dec'hout diouzh an holl draoù-se da zont,
ha da chom en ho sav dirak Mab-an-Den.

war ar profoù - Plijet ganeoc'h, Aotrou Doue, degemer ar profoù a ginnigomp diwar
ho roadoù (tonezonoù). Peogwir e roit dimp, ni ho servijerion er
bed-mañ, ar c'hraas d'ober anezho Korf ha Gwad hor Salver, grit ma kavimp gantañ
ar silvidigezh peurbadus. Dre Jezuz Krist, hor Salver.

rak-kanenn veur - prefas an Azvend I - E gwirionez, Tad santel, Doue hollc'hallou-
dek ha peurbadel, un dra reizh ha dleet eo ho trugarekaat, e pep
lec'h hag e pep anzer, dre Jezuz Krist, hor Salver. Ur wech kentañ eo deuet en ur
gemer hon natur dister, evit kas da benn ar aennad karantez bet divizet gane-
oc'h, a holl viskoazh: digeriñ diamp hent ar silvidigezh. Un eil gwech, e teuy en
en-dro, gant klod ha splannder, evit reiñ diamp en sklerijenn ar Baradoz ar madoù
prometet a c'hortoomp bremañ en ur veilhañ er feiz. Rak-se, unanet gant an Ae-
led hag an Arc'haeled ha gant holl Speredoù galloudus an Neñvoù, e kanomp neu-
leudi d'ho kload, en ur lavarout da viken:

goude keduniñ - Grit ma ray vad dimp, Aotrou Doue, an Oferenn hon eus kemeret

azvend 1 - K

azvend 2 - K

perzh enni: dreizi, e-keit ha m'emaomp o vevañ e-kreiz traoù tremenus ar bed, e troit dija hor c'halonoù da garout madoù an Neñv, na dremenint ket, ha da chom stag outo. Dre Jezuz Krist, hor Salver.

AZVEND 2



Bar 5,1-3

kempedenn- Doue hollc'halloudek ha madelezhuz, grit ma ne vo morse afer ebet eus ar hed-mañ o herzel ouzhimp da vont en arbenn d'ho Mab en e Zonedigezh. Met grit ma vezimp, o heuliañ kentelioù ar furnez eus an Neñv, lakaet da gaout perzh gantañ da viken: Eñ hon Doue bev ganeoc'h ha gant ar Spered Glan, a-holl-viskoazh da virviken.

lennadenn gentañ - E giz-se, emañ bepred an istor, ennañ dilec'hioù poanuis ma vezer dindan yev ar vac'homerezh hag an direizhded. Bez ez eus ivez avat distroioù laouen. Bale a reomp, skañv, evel dibradet gant ar goanag, lavaromp kentoc'h gant Doue dellezek, Eñ nemetken, da vezañ anvet "Reizhded".

1^{an} lennadenn

Klodi Jeruzalem

LENNADENN TENNET EUS LEVR AR PROFED BARUC'H 5. 1-9

- 1 Tenn kuit, o Jeruzalem da sae a gañv hag a c'hlae'har, ha kamer evel gwiskamant da viken ar splannder eus gloar Doue!
- 2 Gwisk mantell reizhded Doue, laka war da benn kurunenn Gloar an Hini Peurbadel!
- 3 Rak Doue a fell dezhañ diskouez da splannder-te d'ar re holl a zo dindan an Neñv.
- 4 Hag hemañ eo an anv a roio Doue dit da viken Peoc'h-ar-Reizhded-ha-Gloar-an-Devotion.

3

azvend 2 - K

- 5 Sav, Jeruzalem, ha chom ez sav war an uhel, ha sell etrezek ar Sav-Hael. Gwel da vugale bodet adalek ar C'huzh-Hael betek ar Sav-Hael, dre urzh an Hini Santel, hag i leun a levenez rak Doue en deus bet soñj!
- 6 Pa oant aet kuit diouzhit, e oant bet kaset war-droad, ambrouget gant o enebourien: hogen Doue o degas en-dro, douget gant enor, evel bugale rouaned.
- 7 Rak divizet en deus Doue izelaat an holl venezioù uhel hag an torgennoù paurbedus, ha kargañ an traoñiannoù evit lakaat plaen ha kompez an douar evit ma kerzho Israel e surentez, dindan gloar Doue.
- 8 Ar c'hoadoù o-unan, hag an holl vez a-c'hwez-vat a zisheolio Israel, dre urzh Doue Rak Doue a heñcho Israel el levenez, ouzh gouloù e c'hoar, en ur reiñ dezho d'o ambroug e drugarez hag a reizhded.

SALM 125 1-2ab, 2cd-3, 4-5, 6

R/ (3) Na kaerat traoù a reas an Aotrou evidomp-ni E-kreiz al levenez e oamp!

- 1 Pa zegas an Aotrou prizonidi Sion en-dro Edomp evel o huñvreal
- 2 Leun a c'hoarzhoù en hor genoù Kanaouennoù war hor muzelloù.
- 2cd Neuze e lavarent e-touez ar Baganed: Na kaerat traoù a reas an Aotrou evit ar re-se!
- 3 Na kaerat traoù a reas an Aotrou evidomp-ni E-kreiz al levenez e oamp.
- 4 Degasit, Aotrou, hor prizonidi en-dro Evel dour-red e gouelec'h Negev!
- 5 Ar re o devoa hadet en daeroù, A gane en ur ober an eost.
- 6 O vont e oant aet en ur ouelañ, En ur zougen o had da hadañ
- 7 O tont e teuent en ur ganañ, En ur zegas o drammoù-ed a-vriadoù.

eil lennadenn - Toullbac'het, Paol a skriv da gristenion Filipoz, anezho ur gedu-niezh (gumuniezh) virvidik ha brokus. Kemenn a ra dezho kenderc'hel war an hent-se hag o c'has da Zoue.

2^o lennadenn

LENNADENN EUS LIZHER SANT PAOL DA GRISTENIEN FILLIPOZ 1, 4-6, 8-1

- Va Breudeur!
- 4 Dalc'hmat, pa bedan evidoc'h-holl, ez eo gant levenez
- 5 e pedan, abalamour d'al lodenn-labour hoc'h eus graet evit an Aviel adal an deiz kentañ betek an deiz a hiziv.
- 6 Ha sur on a gement-man: an Hini en deus boulc'het ennoc'h al labour vat-se, her c'haso betek ar penn betek Deiz Jezuz-Krist.
- 8 Doue a oar ho karan c'hwl holl, gant karantez Jezuz-Krist e-unan.
- 9 Hag hemañ eo va fedann: ma'z aio ho karantez war groskin muloc'h-mul e goulzlegezh hag e pap skiant.
- 10 evit ma c'hellot disheñvalout ar pep gwellañ.

4

azvend 2 - K

Neuze e viot pur ha didamall a-benn Deiz ar C'hrist.

11 leun eus ar frouezh a reizhded (Justis) a zeu dimp dre Jezuz-Krist, evit gloer ha meulodi Doue.

Alleluia !

Lk 3.4.8 Kempennit hent an Aotrou, lakit eeun e wenodennou, Gwelout a raio pep krouadur silvidigezh Doue.

aviel - Ar Salver a zeu davedomp hag ec'h aozomp an hent evitañ, en ur zigerif dezhañ hor c'halonou. Evit-se, eo dav eeunaat ar pezh a zo kildroet ha kannigellet.

Aviel Pep krouadur a welo silvidigezh Doue ! Setu kemennadurezh Yann Vadezour.

PENNAD EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT LUKAZ 3, 1-5

- 1 Er bemzekvet bloavezh eus impaleriezh Tiberius Kaezar, pa oa Poñs-Pilat gouarnour Judea, Herodez tetrark Galilea, Filip, e vreur, tetrark Iturea ha Bro-Drakonitiz, ha Lisaniaz tetrark Bro-Abilen;
- 2 dindan ar veleien-veur Anna ha Kaifaz e teuas komz Doue da
- 3 Yann, mab Zakariaz, er gouelec'h, ha mont a reas dre holl vro ar Yordan en ur embann ur vadeziant a binijenn evit pardon ar pec'hedoù,
- 4 evel ma'z eo skrivet e levr Profesiou ar profed Izaiaz :
« Mouezh unan o krial er gouelec'h :
Kempennit hent an Aotrou.
Lakit eeun e wenodennou.
Pep traoñienn a vo leuniet,
ha pep menez ha pep krec'hienn a vo izelaet,
ar c'hildroioù a vo krennet,
hag an hentoù skoasellek a vo kompezet
hag e welo pep krouadur silvidigezh Doue.»
- 5
- 6

war ar profoù - Plijet ganeoc'h, Aotrou Doue, ma c'hounezimp ho trugarez, gant hor pedennoù hag hor profoù. Ha paz eo re zister hon dellidoù (meritoù), evit reiñ pouez d'hor goulennou, deuit d'hor skoazellañ gant skourioù ho madelezh. Dre Jezuz Krist, hor Salver. Amen !

rak-kanenn veur - prefas an Azvend 1 - E gwirionez, reizh ha santel eo ho trugarekaat, e pep lec'h hag e pep amzer, c'hwilad santel, Aotrou Doue hollec'halloudek ha peurbadel, dre Jezuz Krist, hor Salver. Eñ a zo deuet, evit ar wech kentañ, en ur gemer natur mab-den. Hag, o seveniñ menoz ho karantez e-keñver an dud, en deus digoret dimp an hent d'ar silvidigezh peurbadus. Dre-se, pa zeuio evit an eil gwech, e splannder e c'hloar, e resevimp erfin, e sklerijenn ar baradoz, madoù ar vuhez elrus, emaomp bremañ o c'hortoz gant feiz birvidik. Setu perak a-unan gant an Aelod hag an holl Sent, e savomp hor mouez da veulif ho kloar, en ur lavarout a-greiz kalon:

goude keduniñ - Maget gant bara eus an Nefv, ni ho ped, Aotrou Doue: dre c'hrasoù an oferenn hon eus bet perzh enni, deskit dimp prizañ, gant furnez traoù ar bed-mañ ha treiñ hor c'halon ouzh madoù ar baradoz. Dre Jezuz Krist, hor Salver. Amen!

5



8 A VIZ KERDU MARI KOÑSEVET DINAMM

Ar bedenn diwar ar Vetalenn Vurzhudaouls adrenket gant Sant Maksimilian Kolbe, evit STROLLAD AR WERC'HEZ DINAMM (Militia Immaculatae) savet gantañ

O Mari, koñsevet hep pec'hed,
pedit evidomp
hag en em erbed ouzhoc'h,
hag evit ar re holl n'en em erbedont ket ouzhoc'h,
ha dreist-holl evit ar framañoned.

"Petra hon eus-ni da ober...?" (prederiadenn evit an Azvend 3**)

"Hag e c'houlennont ouzh Yann Vadezour: Petra hon eus-ni da ober ? Luk.3
Den ebet n'eo distailet gant ar Badezour. An holl a zo galvet ha d'an holl e ro ur respont. Rak galvet eo an holl da gemmañ. Yann avat n'o c'halv ket, adal o badeziant en dour, da ober ur vicher all, da gemmañ o stad a vuhez, da ober eveltañ. Nann! Goulenn a ra hepken diganto kemmañ diabarzh ar vuhez a zo o hini, e sternioù ar vuhez a zo o hini, e plegoù o buhez ordinal. Goulenn a ra diganto kemmañ, da lavarout eo: ober en un doare all ar pezh maz int boas da ober bemdeiz, el lec'h, er garg, er vicher m'emañ. Hag ober en ur stumm all a zo

6

ober gant muioc'h a garantez ha muioc'h a reizhded, muioc'h a yonez ar pezh a zo da ober bemdez-Doue.

Yann-Vadezour eta, a-ramp war an daou Destamant a zo un diouganer evel an holl Diouganerion, anezho tud kaset gant Doue, savet gant Doue evit goulenn hag azgoulenn digant an den kaout ur galon all, kaout ur sell all, kaout un dro-spered, kaout un emzalc'h all, un doare all da vevañ. Ha Jezuz e-unan, an Diouganer Den-Doue, a ra heñvel. Ne ehan da embann: "Kanttroit, mar fell deoc'h mont-tre e Rouantelezh an Tad..."


Kalz e vez eus kemañ ar bed, gwellaat urzh ar bed, kemañ ar sternioù, ar frammoù taolet war ar bed-se, evit ma vo bravoc'h bevañ e-kreiz ar bed-se, evit ma vo skañvoc'h d'an den, evit ma vo ur baradozig an douar-se. Pezh a zo yac'h, reizh ha mat-kenañ. Met ankounac'haat a reer re alies ha kalz re ez eo ret d'an den - war an hevelep tro - ober bec'h evit kemañ e galon ha lezel ar galon-se da vezañ troet gant Spered Santel Doue. Hiziv-an-deiz, e klasker doareoù, hentenoù, troioù evit kemañ diavaezioù ar bed ha ne weler ket a-walc'h e tle mab-den kemañ ivez diabarzhioù e galon, e vuhez.

Pep unan ac'hanomp ne wel ket a-walc'h e tlefe kemañ chupenn d'e galon pe d'an nebeutañ keampenn, dresañ, renevezif ar chupenn-se. Ne santomp ket a-walc'h an ezhom-se, evidomp-ni. Perak ? Marteze, abalamour maz omp laouen gant ar pezh maz omp. Feiz, ne vagoamp ket soñjoù re zu diwar hor penn. Diazezet brav omp abaoe pell 'zo. Seder-groñs eo hon askre; ne vez ket mui na hejet na dihejet gwall alies. Ober a reomp bravik ha kempennik ar pezh a zo da ober, hervez al lezenn, hervez gizioù an dud fur. Morse na re na re nebeut. Bepred ar muzul. "Bezañ katolik a zo d'rc'hel mat d'ar muzul..." setu an diskan.

Hag e vever e-giz-se, dall ha bouzar, o vont evel ur c'harr, bepred oc'h heuliañ an hevelep roud. Hag holl, mard omp leal, e rankomp anzav emañ ar stal ganimp, evel-se, kalz pe nebeut. Lavarout a ra Yann Vadezour ez eus ur bal gant ar Meziar en e zorn, evit ober an disparti etre ar greun mat hag al loustoni m'eo ar pell hag ar c'holo a zo da vezañ devet. Sed aze ur skeudenn eus ar Meziar, eus Jezuz hag a ra aon. Ne ro ket dimp al levenez a zo kement anv anezhi, penn-da-benn ar sulvezh-mañ. Ha koulskoude, ma soñjomp mat, skeudenn ar Meziar, gant e bal-netaat, a zo aze evit hor puntañ da gemañ, gant nerzh, gant youl, di-druet ha dizawant. Ha neuze - neuze hepken - e tiwano ennomp al levenez, e tarzho ennomp an drantiz.

"Petra ober...? Da bep unan da glask. Pezh a zo diarvar, evel ma lavar Yere-miaz (1.1), a-raok sevel, plantañ, e ranker dismantriñ, skarzhañ..." Pezh a zo tenn. Dimp-ni da gemañ hor boazioù evit bezañ kemmet gant an Aotrou KIRST, Mab an Doue-se ha ne baouez ket da renevezif pep tra. "Buhez nevez a roio deoc'h, e-me Sofonias, tridal a ray, laouen, evidoc'h..." Ma lakomp chupenn nevez d'hor c'halon, neuze e tridimp gant al levenez, e-ser an Doue-se hag a gorollo evidomp, gant youc'hadennoù lirzhin.

Youenn Troal



KEMERET EN DEUS HOR C'HIG
DIMP DA C'HALLOUT PERZHIAÑ EN E ZOUEELEZH.

kempedenn - Aotrou Doue, pa welit ho pobl o c'h'hortoz gant feiz gouel bras Gini-
velezh hor Salver, grit dimp, ni ho ped, digerifi hor c'halon da leve-
nezhioù ur silvidigezh ken dispar, ma raïmp gouel Nedeleg gant meul^uedioù lidus,
er vrasañ levezeg bepred. Dre Hor Salver Jezuz Krist, ho Mab hag hon Aotrou...
lennadenn gentañ - Evel Izrael, ez omp-ni pedet d'ar gouel, daoust ma n'eo ar
ket ar bremañ un dudi. Rak asur ez omp eus un dra: a-du ga-
nimp emañ an Aotrou. Ganimp emañ. Tost emañ an dazont laouen.

1an lennadenn
Joa ha levezeg da Sion, da lavarout eo d'an Iliz.
abalamour d'ar c'heloù-mat degaset dezhi.

LENNADENN EUS LEVR AR PROFED SOFONIAZ 3. 14-18a

- 14 Kan gant ar joa, o Merc'h Sion !
Laosk kriadennoù a levezeg, o Israel.
En em laouena ha trid a-greiz da galon, o Merc'h Jeruzalem.
- 15 An Aotrou en deus tennet kult ar setañs douget a-enep dit.
Kaset en deus da enebour war e giz.
Roue Israel ez eo an Aotrou ez kreiz :
Ne welli ken a walenn-a-gastiz.
- 16 En deiz-se e vo lavaret da Jeruzalem :
Bez dinec'h, o Sion !
Na lez ket da zaouarn da gouezhañ.
- 17 An Aotrou, da Zoue, a zo ez kreiz
- ur brezelour-meur salver -
tridal a ra gant al levezeg abalamour dit-te,
lammat e ra e galon gant ar garantez,
tridal e ra gant al laouenedigezh abalamour dit-te.
- 18 evel en deizioù-gouel.



Bar.

Bez dinec'h, o Sion!
Na lez ket da zaouarn da gouezhañ.
An Aotrou, da Zoue, a zo ez kreiz!

SALM (Iz. 12, 2-3; 4bcd, 5-6)

- R/ (6) Youc'h ha trid gant al levezeg, Pobl Sion,
Rak bras eo ez kreiz Sant Israel.
- 2. Doue eo va silvidigezh - fiziañs am eus
Aan ebet n'em eus rak netra.
- 3. Rak an Aotrou eo va nerzh ha va meuloudi.
Bet eo evidon ar silvidigezh.
- 4bcd Meulit an Aotrou, galvit e anv.
Embannit e-touez ar pobloù e oberoù bras.
Degemennit ez eo uhel e anv
Kant d'an Aotrou !
- 5 Rak graet en deus traoù dispar,
Ra vint anavezet gant an douar a-bezh.
Youc'h ha tridit gant al levezeg, Pobl Sion.
Rak bras eo ez kreiz. Sant Israel.

eil lennadenn - Perak bezañ ankeniet evit netra? Seder e vimp ma n'eus ket ga-
nimp prederioù danvezel, n'eus ket anezho pa vez kenskoazell.
Ur pal ez eo ar peoc'h hag ur gourc'hemenn. "Doue ar Peoc'h" ne c'hell ket bezañ
ganimp, nemet pa vez graet pep tra evit kavout un emglev.

2^a lennadenn
An Aotrou a zo tost, bezit al levezeg !

LENNADENN EUS LIZHER SANT PAOL DA GRISTENIEN FILLIPOS Fil. 4. 4-7

- Breudeur !
4 Bezit laouen bepred en Aotrou,

- ur wech c'hoazh e lavaran : bezit laouen !
- 5 Ra vo anavezet ho touter gant an holl.
- 6 An Aotrou a zo tost: arabat deoc'h bezañ nec'het,
met e pep degouezh, dre bedennoù ha goulennoù,
gant komzoù a anaoudegezh vat, roit hoc'h ezhommoù
da anaout da Zoue.
- 7 Ha neuze ar peoc'h a Zoue hag a zo dreist pep skiant,
a ziwallo ho kalonoù hag ho soñjezoù, e Jezuz-Krist.

A Hleuia Izalae 61 (cf. Lk 4.18)

Spered an Aotrou a zo warnon,
va c'haset en deus da zegemenn ar c'heloù-mat d'ar beorien.

aviel- Embregomp ar garantez hag ar yonez (justiz), hadomp ar peoc'h hag al le-
vezeg hag an Aotrou a c'hello mirout hon eost en e c'hrignol.

Aviel
Kantelioù Yann-Vadezour en e brezegennoù
PENNAD EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT LUKAZ 3 10-18

- En amzer-se,
e c'houlenne an engrezoù-tud digant Yann :
« Petra'ta hon eus-ni da ober? »
Respont a'rae dezho :
- an neb en deus div vantell, reiñ unan d'an hini n'en deus ket;
hag an neb en deus boued, ober kement all »
- 12 Donet a reas ivez publikaned evit bezañ badezet;
hag int da lavarout dezhañ :
- Petra'ta hon eus-ni da ober? »
- 13 Han e respontas dezho :
- Na c'houlennit netra en tu all d'ar pezh a zo oet divizet ouzhoc'h »
- 14 Goulenn a rae ivez soudarded digantañ :
- Petra hon eus da ober, ni ivez? »
Hag e lavaras dezho :
- Na waskit den ebet, na ziskuilhit den ebet e gaou,
ha tremenit gant ho kopr »
- 15 Evel m'edo ar bobl war-c'hed, ha m'en em c'houlenne an holl
en o c'halonoù diwar-benn Yann hag-eñ ne vefe ket ar Mesiaz,
e roas Yann e respont en ur ziskleriañ d'an holl :
- Me ho padez en dour, met dont a ra unan galloudusoc'h egedon
ha ne don ket dellezek da ziskoulmañ korreem e sandalenoù.
Eñ ho padezo er Spered Gian hag en tan.
- 17 En e zorn emañ e bal-wentat da beurnaetaat e leuriad ha da serrañ
ar gwinizh en e solier; ar pell avat, a zevo en un tan ha na varv ket »
- 18 Er stumm-se hag e meur a stumm all a rae Yann e c'halvadenn d'ar bobl
hag e tegemenne dezho ar c'heloù-mat.

war ar protoù - Pijet ganeoc'h, Aotrou Doue, ma talc'himo bepred ni ho servije-
rion deol, da ginnig deoc'h an aberzh, evit lidañ mister sakr an
Aoter, en deus ho Mab lezet ganimp da ober, hag evit sachañ warnomp grasoù ner-
zhus ho silvidigezh. Dre Jezuz Krist, hor Salver.


rak-kanenn veur - pefas an Azvend 2 - E gwirionez, Tad santel, Doue hollc'hal-
loudek ha peurbadel, un dra reizh ha dleet eo ho trugarekaat

azvend 3 - K

e pep lec'h hag e pep amzer, dre Jezuz Krist, hor Salver. Eñ eo ar Mesiaz o deus ar Brofeded diouganet a bell amzer, ar Mab he deus ar Werc'hez gortozet gant karantez dispar, ar Salver en deus Yann Vadezour diskleriet o tonet ha diskouezet d'an dud evel deuet en o zouez. Eñ eo an hini hon laka d'en em dreñf gant levez-nez war-du mister e C'hanedigezh, ma vimp kavet gantañ, pa zegouezho, o veilhañ er bedenn hag o tridal er veuleudi. Rak-se, unanet gant an Aeled hag an Arc'haeled ha gant holl Speredoù galloudus an Neñvoù, e kanomp meuleudi d'ho kloar, en ur lavarout da viken: Santel, santel, santel...

goude keduniñ - Ho madelezh a bedomp, Aotrou Doue. Skoazellet gant ar magadur doueel hon eus degemeret, ra vimp gwalc'het eus hor pec'hedoù ha lakaet e stad da lidañ ar gouel bras a dosta. Dre Jezuz Krist, hor Salver.

EÑ HO PADEZO
EN TAN HAG ER SPERED



azvend 4 - K

kempedenn - Plijet ganeoc'h, Aotrou Doue, skuilhañ ho kras en hor c'halonoù. Ni hag hon eus anavezet, dre salud an Ael, mister ho Mab en em c'hraet den. Hentit ac'hanomp, dre e Basion ha dre e Groaz, betek gloar an Adsav da vev. Drezañ, Jezuz Krist, hor Salver hag hon Aotrou, Doue bev ganeoc'h ha gant ar Spered Glan a-holl viskoazh da virviken. Amen!

lennadenn gentañ - Eizh kantved a-raok ar C'hrist, e kemenn Mikeaz e C'hanidigezh e Betleem, kêr David, kêr dister ha dilezet, evel ma vo ar Mesiaz e-unan.

Ian LENNADENN

Profesi war Vetelem : ac'hano e teulo ar Mesiaz.

LENNADENN EUS LEVR AR PROFED MIKEAZ 5, 1-4a

- 1 Setu amañ ar pezh a lavar an Aotrou Doue :
: Te avat, Betlehem Efrata - an hini vilhanañ e-touez pobladoù Youda,
ac'hanout-te a lakin da sevel ar rener evit Israel,
unan hag amañ don e wrizioù en amzer wechall,
en deizioù pell'zo tremenet.
- 2 Rak-se ne zilezo Doue e bobl nemet betek an amzer ma teuy
evit ar vaouez a zis kaout ur bugel, ar mare d'e lakaat er bed,
ha neuze, ar re eus e ouenn hag a vo c'hoazh e buhez,
a zeulo davet o breudeur a Israel.
- 3 Sevel a raio sonn en e sav, hag e vo o mesar hag o fastor gant nerzh
an Aotrou ha gant gloar anv an Aotrou, e Zoue.
Hag e talc'hint da vezañ dienkreiz, rak bremañ en em led e c'halloud
betek pannoù-pellañ ar bed,
hag e vo eñ e-unan ar Peoc'h.

Salm 79 Zac & Jb, 15-16, 18-19

R/ (4) Aotrou Doue, hon distroit
Sklaerait ho trem hag e vimp salvet.

- 2 Pastor Israel, selaout,
C'hwil azezet war Gerubined,
Dihunit ho kalloud
Ha deuit d'hor salviñ.
- 15 Doue, Mestr ar Bed, distroit,
Sellit eus an neñvoù ha gwelit,
Deuit d'ober ur gwel d'ho kwinienn
- 16 Diwallit ar winienn en deus plantet ho torn,
Ar blantennig hoc'h eus maget evidoc'h.
- 18 Ra vo ho torn war den ho tu dehoù
War vab-an-den hoc'h eus maget evidoc'h
- 19 Ne zistokimp mui diouzhoc'h
Hon lezit da vevañ hag en hoc'h anv e pedimp.

eil lennadenn- Vak da youl e Dad adal e C'hinivelezh, Jezuz a zo a-bezh digor ha degemer d'e Dad.

Setu ma teuan, va Doue, evit ober ho polantez.

LENNADENN EUS AL LIZHER D'AN HEBREED 10, 5-10

Va breudeur

- 5 En ur antren er bed e lavar ar C'hrist :
Na sakrifis na profadenn n'ac'h eus ket goulet evit ar pec'hed

met ur c'hort hoc'h eus kempennet din;
 6 na loskaberzhioù nag ar sakrifisoù evit ar pec'hed
 ne dint bet plijet dit.
 7 Neuze am eus lavaret : Setu ma teuan-me rak e roll al Levr
 ez eo diwar va lenn ez eo skrivet :
 evit ober, o Doue, da volontez.
 8 Da gentañ e lavar : nag aozerzhioù (sakrifisoù) na profadennoù,
 na loskaberzhioù, na kinnigoù evit ar pec'hed
 n'oc'h eus goulet ha ne dint ket plijet dit.
 Ha koulskoude e vezont kinniget hervez al Lezenn -
 9 Ha neuze e lavar : Setu ma teuan-me evit ober da volontez.
 Diskar a ra an urzh kentañ evit diazezañ an eil.
 10 Ha dre ar volontez-se ez omp santelaet,
 dre ar c'hinnig en deus graet Jezuz-Krist eus e gorf e-unan,
 ur wech evit mat.

Alleluia! Lk. 7. 38
 Setu servijerez an Aotrou,
 Ra vo graet din hervez da lavar. Alleluia!

aviel- Mari hag Elizabed, evel pa vijent dibradet a-us d'an douar...0 reif ul
 1 levenez dreist pep levenez, e laka ar Spered pep tra da vleuniñ ha da
 ganañ.

PENNAD EUS AN AVIEL SANTEL HERVEZ SANT LUKAZ 1.39-45

39 En amzer-se e savas Mari hag ez eas, mall warni war-zu bro
 ar menezioù d'ur gêr eus Bro-Youda;
 hag o vezañ antreet e li Zakariaz e saludas Eli zabad.
 41 Met kerkent ha ma klevas Elizabed salud Mari
 e tridas ar c'hrouadurig en he c'hreiz,
 hag a voe leuniet gant ar Spered Santel.
 42 hag e youc'has gant ur vouezh kreñv, en ur lavarout :
 « Benniget out e-touez ar gwragez, ha benniget fouezh da gorf
 43 A belec'h e c'hoarvez ganin e teufe d'am c'haout mamm va Aotrou?
 44 Rak setu, kerkent ha m'eo deuet da vouezh betek va divskouarn,
 en deus tridet va bugelig em c'hreiz gant al levenez.
 45 Eürus an hini he deus kredet e teufe da wir ar c'homzoù
 a zo bet lavaret dezhi a-berzh an Aotrou.»

rak-kanenn veur - gwelout p.9

war ar profoù- War ar profoù lakaet amañ war hoc'h Aoter, ra ziskenna d'o sante-
 laet an hevelep Spered Glan en deus karget gant e c'halloud korf
 sakr ar Merc'hez klodus Vari. Ni ho ped dre Jezuz Krist, hor Salver. Amen!

goude keduniñ - Ho pediñ a reomp c'hoazh, Aotrou Doue, goude m'hon eus bet 9r Go-
 munion, an arrez eus ar silvidigezh peurbadus. Seul-vui ma tosta
 ar Gouel a zegas dimp ar Salver, grit dimp mont war well gant seul-vui a garan-
 tez, evit lidañ, e doare, Mister Ginivelezh ho Mab Jezuz Krist, hor Salver. Amen!

Person santel Ars o komz
 diwar-benn ar beleg...

"Ar beleg ne vo komprenet ervat petra eo, nemet en neñv. Ma komprenjed a-
 nezhañ war an douar, e varvjed, n'eo ket diwar spont, met diwar garantez.

Ma tegouezjen gant ur beleg hag un ael, e saludjen ar beleg a-raok salu-
 diñ an ael. Hemañ a zo ur mignon da Zoue, met ar beleg ez eo e blas emañ o ter-
 c'hel.

"Aotrou Person, tud a ouenn-vat-kenañ, evelkent, a zo e-touez ar velision
 - Petra 'lavarit, va mignon? Hep mar ebet ez eus tud onest en hon touez.

Pelec'h 'ta e vijent, ma n'eo ket eno? Met, a-benn lavarout an O-
 ferenn, e vije ret bezañ ur serafin. Ma ouezjed petra eo an Oferenn, e varvjed.
 Ne vo komprenet petra eo an Oferenn, nemet en neñv. Va mignon, ar pennabeg d'an
 holl zrougeur-se ha d'al laoskaat ma ra ar beleg, ez eo ma ne vezer ket war e-
 vezh ouzh an Oferenn. Siwazh! va Doue, nag ez eus peadra da gleñn war ar beleg,
 pa ra kement-se evel un dra diwar voaz. Hiniennoù'zo hag o deus kroget ken
 brav, lavaret ken disi an Oferenn e-doug un nebeut mizioù! Ha da c'houde...

O, pa soñjer en deus fellet d'an Doue meur fiziout kement-se e tud reu-
 zeudik evel domp-nil ar pezh a ra droug eo ar c'helleier-se eus ar bed, an divi-
 zoù-se, ar politikerezh-se, ar c'hazetennoù-se. Kargañ a reer ganto an empenn, ha
 da-c'houde, ez eer da lavarout an Oferenn santel, ar breviel. Va c'hoant bras a
 vefe en em dennañ e FOURVIÈRE, hep den da blediñ gantañ, ha, war-lerc'h pediñ a-
 zoare, mont da dremen va amzer er c'hlañvdi. O, nag e vijen evurus!

"Ac'hanta, mignon, arabat eo koll fiziañs! Met gwelit, ar breviel a zo
 skañv evel ur bluenn, ar pouez a bersoned war-roll-ar-sent a zo enañ. Ar pezh
 a goll ar veleien eo mont d'en em velout hep ehan. Metra gwelloc'h eget war a-
 fed, ur wech an amzer, da welout ur c'henvreure, da glask digantañ skouer vat, da
 gofesaat. Met redek dibaouez, siwazh! Abostoler (sous-diacre) ez oc'h, va m-
 ignon, o nag ez emañ brav ar bed ganeoc'h! Ur wech ma vezer beleg, ne vez da ober
 nemet gouelañ war ar reuzeudigezh an-unan. A-benn bezañ sant, eo ret bezañ
 aet diskiant, bezañ kollet ar penn. Ar pezh a vir ouzhip-ni, beleion, da vezañ
 sent, ez eo an diouer a brederiusted (réflexion). Ne zistroer ket e-barzh an-u-
 nan; ne ouezer ket petra 'reer. Ar prederiañ, ar pediñ a-galon, an unanizezh gant
 Doue eo ar pezh hon eus ezhomm. O nag ez eo un dra truezus, ur beleg ha n'eo
 ket "a-ziabarzh" (intérieur). Met a-benn erruout eno ez eus ezhomm habaskted
 (tranquillité), didrefu (silence), emdennusted (retraite-diskrog diouzh prederioù
 ar vuhez penderiek), va mignon, emdennusted!

A-wechoù, e lavaran d'an Ao. 'n Eskob Deviz: war fell deoc'h distreiñ hoc'h
 eskopti war-du Doue, eo ret deoc'h ober sent eus hoc'h holl bersoned. An tu da
 vezañ beleg a-zoare a vije bevañ e-gir ur c'hloareg. Met ne c'heller ket atav.

Evezhiadenn - M'am eus lakaet etre kromsennoù un nebeud gerioù gallek ez
 eo en abeg m'o deus ar re-anañ ur ster diouto o-unan e yezh
 an deoliez hag en abeg n'on ket diavarvar e-keñver fealded an droidigezh a gin-
 nigan anezho.

A.B.K.

chomlec'h AR FULENN : ar presbital - 29223 Plouencour-Menez

AN TOUR-TAN

Lein-ar-Roc'h

KERGRIST-MOELOU

22110 ROSTRENEN

Nevez deuet er-maez:

KANENNOU SANTEL

gant Job Lec'hvien, beleg

Embannet eo e 1983 gant an TOUR-TAN un dastu-
KANTIKOU BREZHONEK liesskrivet, gant tonioù,
tennet, an darn vrasañ anezho, eus ur rollad
hengounel implijet e rann-ilizoù Breizh.

Oc'h embann, bremañ, KANENNOU SANTEL, en deus
fellet d'an aozer klokaat ar rollad-se ha kin-
nig d'ar vrezhonegerion un dastumad nevez, ten-
net an danvez anezhañ eus ar Salmoù. N'eo ket
un droidigezh nevez, met kanennoù savet unan
diwar pep salm, 150 en holl, aes da ganañ war an

tonioù kozh anavezet hag embannet e KANTIKOU BREZHONEK pe ten-
net eus BARZIAZ BREIZH. Savet int bet dreist-holl, evit harpañ
gristenien a glask ober, en o buhez pemdeziek, gant yezh o bro
hag o zadoù, hag evit neveziñ, un tamm bennak, gant doujañs eus ar
Skritur Sakr, ar c'hanennoù hag a blij dezho ober ganto en o bo-
dadegoù ha lidadegoù hag ivez, bomdez, en o ziegezhioù.

KANENNOU SANTEL : ul levr 15 x 21 - 160 pajenn
priz: 75 lur

Levrioù all

embannet gant an TOUR-TAN:

AR BIBL SANTEL

- Al Lezenn..... 55 lur
- Ar Brofeded Kentañ 55 lur
- Ar Brofeded Vras hag an 12⁶⁵ lur
- Ar Salmoù hag ar skridoù all : 95 lur
- Al Levrioù eilkanonel : 85 lur



- Kantikoù brezhonek (dastumad notennet) 25 lur
- Pedenn an Iliz (breviel) 50 lur

mizoù-kas: 10% ouzhpenn